

# KANTIG SANT PER

Gouezec

DISKAN :

*Sant Per, prins an Ebestel,  
Deomp holl roit ho pennoz ;  
Ha pa vo deuet an eur da vervel, } bis.  
Digorit deomp ar baradoz.*

1. Sant Per ganet e Bethsaïda,  
Eus a gerent paour ha dister,  
War bouez e zivrec'h 'ranke beva :  
Pesketer' oa eus e vicher.
2. Pa oe prezeget an Aviel,  
Gant Jezuz e bro Galile,  
Per, da selaou e gomzou santel,  
A yeas gant e vreur Andre.
3. Eun degemer leun a garante  
A zo graet d'ezan gant Hor Salver ;  
Reseo a ra eun ano nevez :  
Elec'h Simon eo anvet Per.
4. Per a zo eun ano mysterius :  
Maen a zinifi ar ger-se.  
En e Iliz e fell da Jezuz  
E ve Per ar maen-diazez.
5. Jezuz e touez e holl Ebestel,  
A ro da Ber ar plas kenta ;  
Ha, d'an envou pa zeuio da sevel,  
Per' zalc'ho e blas er bed-man.
6. Sant Per, ganeoc'h, 'n he amzer genta  
Eo bet renet Iliz Doue ;  
E kreiz ar brezel graet d' ezi breman  
Beilhit warni gant karantez.
7. Per, pa zeu mare ar Basion,  
A ra siouaz ! eun dra euzus :  
Betek teier gwech dre bresomption,  
E nac'h e vestr karantezus.
8. Daoust d'e bec'hed beza ken grevus,  
Per ne ra ket evel Judaz.  
Gouzout mat a ra madelez Jezuz  
zo ledannoc'h 'vit ar mor bras.
9. Sant Per, en deus roet e vuhez,  
Evit chom d'ar feiz bepred-fidel ;  
Ni evit hor feiz rank beza ivez  
Prest da c'houzanv ha da vervel.

